

E brezhoneg | Société | Justice | Religion | Sociétal

## Al Libre-Pensée evit... ar burkini !

17/08/2021 04:05

Biskoazh ! Betek-henn e oa ar strollad La Libre-Pensée a-enep an holl relijionoù, forzh peseurt liv e vefent. Hogen, ar bloavezhioù diwezhañ e troas kein ar strollad ouzh al likelezh evit souten ar « relijion » muzulman par ma c'hell. Emañ al Libre-Pensée a-enep ar relijion gatolik nemetken a-benn ar fin.

D'an 10 a viz eost ez eus bet embannet ur gemenadenn gant kevread ar Garon-Uhel ma sav ar strollad A-ENEP un diferad-kêr bet kemeret gant maer Muret-Plage en Okitania. En diferad-mañ, André Mandement a verzh ar burkini war aodoù ar gumun. Pemp muzulmanez a oa bet tapet gwisket e fin miz gouere gant ar graiamant islamek-se war an draezhenn ha, da heul, e voe embannet an diferad. Met ne blijas ket kement-mañ da baotred al likelezh war-zigarez e vefe « un taol a-enep ar frankizoù diazez ». Ha ma vefe seurezed gwisket evel el c'houent o rouzañ war an aod ?

An tu-kleiz o vreinañ muioc'h-mui 'm eus aon...

Crédit photos : DR

[cc] [Breizh-info.com](https://www.breizh-info.com), 2021, *dépêches libres de copie et de diffusion sous réserve de mention et de lien vers la source d'origine*

.....